


# HEKLEV SEVENADUREL

|  |               |    |
|--|---------------|----|
|  | A-dreuz lenn  | 2  |
|  | Petra nevez ? | 7  |
|  | Kelaouennoù   | 18 |
|  | Notennoù      | 28 |

Herve LATIMIER

**Faces,**  
gant Martina Cole,  
Headline, 2008,  
666 pajenn, £7.99




Diaes eo lavarout ez eo ul levr polis. An nebeud poliserien a gaver ennañ a zo gwerzhet d'an dorfedourien ha n'eus enklask polis ebet. War ar golo e lenner *The dangerously thrilling new novel from the N°1 bestseller*. Feuls eo al levr e gwirionez ha gellout a reer kridienniñ o lenn anezhañ. Istor ur penn gang eo. Ur penn gang trelatet.

Feuls en e “labour”, feuls en e vuhez personel. Savet mat eo an istor daoust d'un toullad gwanderioù stil (memes troiennoù pe frazennoù o tont re alies, prantadoù heñvel an eil re ouzh ar re all a-wechoù). Un dra dedennus eo e tremen an traoù e-touez torfedourien a orin iwerzhonat e banlevioù paour Londrez. Istor Danny

Cadogan a zo hini, klasel en ur stumm, un den yaouank oc'h ober e hent betek dont da vezañ unan eus pennoù bras (*a Face*) kevredigezh an dorfedourien met gwriziennet en ur metoù iwerzhonat ha katolik. Meneg a gaver eus an IRA (p.265) zoken evit lavarout (buan...) o deus paotred an IRA o rouedad

hag ezhomm ebet eus liammoù gant ar gangoù. Darempredoù souezhus an dudenn bennañ gant an iliz katolik hag e zoare feiz a vez taolennet meur a-wech. Lenn a reer aes an istor daoust dezhañ bezañ taer ha teñval. Marteze he deus graet an aozerez a-ratozh tizhout 666 pajenn...

**Facteur pour femmes,**  
gant Didier Quella-Guyot ha  
Sébastien Morice,  
GrandAngle (Bamboo), 2015,  
112 pajenn, 18,90€



Ur sell un tamm disheñvel war ar Brezel Bras eo *Facteur pour femmes*, ur gwir romant e stumm ul levr bannoù-treset. Aet an holl baotred en oad d'ar brezel ha ne chom er vro nemet paotred kozh, bugale, Mael, un den yaouank e droad-boul hag ar merc'hed...

Ur sell war gevredigezh un enezenn e seurt degouezhioù. Ur sell war dremmwelioù an enezenn ivez (diaes eo chom hep soñjal en Enizenac'h) daoust ma lavar an tresour n'eus ket tu da

gavout an enezenn bet taolennet gantañ war ur gartenn.

Ur wech aet kuit ar baotred ez eus ezhomm da gaout unan bennak evit bezañ paotr al lizhiri. En em ginnig a ra Mael ha setu eñ o vont war e varc'h-houarn a di da di da gas lizheroù ha d'o c'herc'hat... Ma tiviner un tamm ar pezh a c'hell c'hoarvezout ez eus kalz darvoudoù n'heller ket diskuliañ ha kalzik zo peogwir ec'h echu ar romant e 1958...

Savet mat-kaer eo an istor, brav-kenañ eo an tresadennoù. En

diavaez eus an tudennoù pennañ e kaver ur bern re all taolennet resis (ar skolaer, ar maer, tad

Mael, ar person...).

Un oberenn a-feson a lenner gant plijadur.

**LE ZHBécédaire, Lexique  
politique radical de  
Bretagne,**  
gant Gael Robin,  
Editions Goater, 2015,  
96 pajenn, 12€



Lod eus hol lennerien a anavez Gael Roblin. Ar re-se ne vint ket souezhet gant ton al levrig-mañ. Kenkoulz eo d'ar re all lenn mat ar rakskrid *En guise d'avertissement...* a-raok kregiñ gant ho lennadenn. Ur benveg stourm eo eta ha n'eo ket ur studiaden. Gellout a ra bezañ un diazez evit eskemmoù mennozhioù ivez. Atahinañ a zo un doare da doullañ kaoz, ket da virout ouzh ar rendael...

Ar stumm geriaoueg bet dibabet gant Gael evit e levr a zo sklaer. Berr eo pep pennad, mont a reer eus an eil d'egile, distreiñ diouzh ret, hep kaout aon koll red ar preder.

Meur a hini a vo hegaset gant pennadoù zo, souezhet gant

re all, pe gant an diouer a reoù zo... Kavet 'm eus souezhus da skouer ne vefe pennad ebet diwar-benn *Skol an Emsav* pa ouzer al labour bet graet gant an aozadur-se e-kerzh ar bloavezhioù 70. Hep *Skol an Emsav* ne vefe ket bet eus *Diwan* (p.19) sur a-walc'h, na marteze eus *Stourm ar Brezhoneg* (p.78) nag eus *Gouel ar Brezhoneg*. Kavout a ran bepred un tamm bugel an doare o deus tud zo da lakaat da grediñ e vefe diwanet *Gouel Broadel ar Brezhoneg* (p.34) diwar netra. Bet ez eus bet a-raok *Gouel ar Brezhoneg*, adalek 1974. Ne lavaran ket ne oa diforc'h ebet met n'eo ket un abeg evit ankouaat al labour bet graet e Gwengamp, Kastell-

Paol, Pont-'n-Abad hag e lec'h all. Meskañ stourm sevenadurel, diviz politikel ha gouel a oa bet graet c'hoazh.

E-touez ar pennadoù a c'hello hegasiñ hiniennoù ez eus an hini a-zivout *UDB* pe a-zivout ar ger "*Régionalisme*". Ha koulskoude e kaver traoù (ha re a-bouez) boutin etre mennozhioù *UDB* ha re C'hael : plas *Diwan*, labour *Dibab* evit ur referendom a-zivout plas Liger-Atlantel e Breizh, plas diazez an

demokratelezh hag ur sell war an ekonomiezh hag an endro. Zoken war dielfennadur luskad ar Bonedoù Ruz e c'heller kavout traoù tost... Danvez eskemm a zo eta.

Nerzhus (tagus a-wechoù) eo stil Gael Roblin. Aes eo al levra da lenn. Domaj e vefe chom hep en ober rak magañ a ra ar vreutadenn abalamour d'e emouestladur ha d'e zibaboù krenn...

**Bretagne-France : une relation coloniale,**  
gant Gael Briand,  
IJIN, 2015,  
56 pajenn, 6€



Setu c'hoazh danvez preder degaset gant un den yaouank. Chomet on un tamm war ma c'hoant rak kavet em eus an oberenn re verr evit un arnodskrid ha re hir evit ur pennad hag un tamm dizurzh. Ne santer ket mat ar steuñv. Ne weler ket bepred al liammoù

etre rannoù zo daoust dezho lavarout traoù dedennus drezo o-unan. Diaezamant em eus bet o kompren pennadoù zo evel an hini a-zivout Vichy ha Liger-Atlantel (p.37) da skouer. Petra en deus bet c'hoant lavarout ? Tri zra a-bouez bras am eus kavet el levrig. Da gentañ kaout

disfiz ouzh ar sell romantel war Vreizh. Eil poent : chom hep klask sentiñ ouzh patrom Frañs ha klask ober eus Breizh ur Frañs vihan (kemplez ar re drevadennet). Trede poent (pouezus-kenañ) chom hep kouezhañ en antell an “na ruz na gwenn”. Ret eo liammañ ar stourm evit emrenerezh hor pobl gant ur sell war ar gevredigezh a fell deomp sevel hag ur stourm


evit ar raktres-se. Reiñ a ra Gael skouer an *SNP* war an dachenn-se gant gwir abeg. Gant ar c’hudennoù a sav er bed a-vremañ n’heller ket soñjal e vo gwelet traoù zo “goude”. Ur bern prederiadennoù pouezus a gaver el levr eta. Danvez eskemm ha peadra da vagañ un eil embannadur resisoc’h evit lodennoù zo ha sklaeroc’h e-keñver dibun ar preder.





**Herve LATIMIER &  
Malo BOUESSEL du BOURG**

**1973,**  
gant Bernez Tangi,  
Skrid,  
139 pajenn, 12€



24 bloaz e oa Bernez Tangi e 1973, dres evel Kelig, penndu-denn ar gronikenn e-ser Fantig, a zo dindan 18 vloaz c’hoazh. Gant ar ger “kronikenn” em eus graet, rak tostoc’h ouzh un deizlevr emeur eget ouzh ur romant klasel. Ha moarvat ez eo intret al levr gant eñvoriou bevet. Taolennoù buhez yaouankizoù e Breizh-Izel e 1973, mignoned ha mignonezed


anezho. Un dezrevell diblaen evit buhezioù ken digompez all. E penn kentañ pep pennad ez eus ur gerig diwar-benn darvoudoù bet er bed bras : ar peoc’h o tont e Viêt Nam, Iwerzhon o vont e-barzh Kumuniezh Europa, afer ar *Watergate*, gwask an arme war Salvador Allende... E Breizh-Izel emamp koulskoude, e kêrioù ha kêria-dennoù bihan. Met santout a

reer chaoudouron ar bed nevez o virviñ en ostaleri an *Ti Kozh* e Montroulez. An unaniezh frank, ar butun drol, Thoreau ha Gandhi, an arbennerien a gousti-añs hag an didrevadenniñ, Pink Floyd, Gwernig, Stivell ha Storlok, ar festoù-noz, an traktourien, ha taolioù-kaer an *FLB*... Un aergelc'h a frankiz m'en em vesk an hengoun gant ur bed dianav ma spluj ar re yaouank ennañ a galon laouen. Dibalamour int, difoutre, dichek a-wechoù, o klask toullañ hentoù dieupoc'h er vuhez. Labourat a reont hirik ha berrik. Ur plas bras o deus ar gouelioù hag ar c'hanaouennoù. Dispac'h Mae 68 n'eo ket gwall bell c'hoazh, levezonet gant ar *beat generation*

hag a zo en em ledet abretoc'h er Stadoù-Unanet. E 1957 e oa bet embannet *On the road* gant Kerouac... Un tamm mat a eeunegezh a zo gant an uhel-vennadoù nevez-se avat. Ha dañjerus e c'hell bezañ evit ar re gizidikañ hag ar re vreskañ. Fantig, ar plac'h yaouank prim he ger, e troio fall an traoù eviti : « Dous eo e follentez, taer eo va hini pa grog ar fulor ennon ». N'eo ket hegreidik Bernez Tangi pa gouna an amzer-hont neuze. Abaoe ez eus tremenet meur a varr-avel. Hag un tamm mat a hiraezh a vez santet er freskenn voemus en deus livet. Ur werz hir eo, ur prezegton ma n'eo ket ur meulgan...

MBdB

**Kanoù Noz,**  
gant Friedrich Hölderlin,  
brezhoneg gant J-F Kirjuhel,  
B.Tangi, A. ar Gall ha  
G. Denez.,  
TIR,  
76 pajenn, 10€



Ganet e oa bet Hölderlin e 1770 e Lauffen-am-Neckar. Studial a reas an doueoniezh e Tübingen, asambles gant tud

ken brudet ha Shelling pe Hegel. Karout a reas Suzette Gontard, gwreg ar bankour Jakob Gontard, pa oa-eñ kelenner prevez



en o ziegezh, ha ret e voe dezhañ mont kuit pa voe tapet ar c'had war he ched. Pa varvas Suzette, a vez graet Diotima anezhi gant Hölderlin en e skridoù, e pegas an trevari er barzh. E-pad 36 bloaz e labouras e stal ur munuzer, e Tübingen, e-lec'h ma varvas e 1843.


Barzhonegoù en deus savet Hölderlin, hag ur romant, *Hyperion*. Boas eur d'ober dioutañ "marc'h-blein an uhel-vennadouriezh" alaman. Kavet e vez en e varzhonegoù prederadennoù uhel ha romantel, ur gened c'hlan ha lourennel ganet e-kreiz an natur orin : puilhañ a ra ar stered, an eter, an doueoù, ar c'houmoul arc'hant... Gouzout a ra petra eo ar poanioù karantez koulz ha poanioù ar geizh. Klask a ra Hölderlin unvaniñ an hiniennoù gant ar boud hollel. Fellout a ra dezhañ reiñ digor d'ur vuhez diabarzh fonnus ha kas spered Mab-den war-zu an uheloù : « Deus en-dro, kaerder bev, er c'halonoù reuzeudik ! » Klask a ra degas un tamm peoc'h d'un tonkadur gwall dragek ivez : « hag e veizer eo hir ha speredel ar vuhez ». Levezonet eo bet gantañ barzhed veur evel Rilke,

Trakl ha René Char e Bro-C'hall zoken.

Barzhonegoù Hölderlin a zo lec'hiet en un amzer bet... Kavet e vint romantel betek re gant lod tud, hollgaer ha glan-meurbet gant tud all. Ra vo saludet labour aketus an tri zroer. O seizh gwellañ o deus graet evit ma chomfe heson hag aes da gompren gwerzennoù ar barzh evit ar vrezhonegerien a-vremañ.

*MBdB*

**An estren,**  
gant Albert Camus,  
brezhoneg gant  
Erwan Hupel,  
Skrid,  
104 fajenn, 10€



« En hor c’hevredigezh, kement den ha ne ouel ket e-pad interamant e vamm a zo e taras bras da vezañ kondaonet d’ar marv », a skrive Albert Camus a-zivout *An estren*, e romant kentañ, bet embannet e 1942.

Meursault, ar benndudenn, en deus resevet un telegramm o kemenn dezhañ e oa marv e vamm. Ne ziskouez tristidigezh ebet e-pad an obidoù. An deiz war-lerc’h ez a da welout ur film gant Fernandel e-ser ur genseurtez, ha c’hoari daou ganti diwezhatoc’h. Nebeut goude, diwar un heuliad degouezhioù, e lazho Meursault un Arab war un draezhenn gant pemp tenn pistolenn. « Abalamour d’an heol, » emezañ... Eil lodenn ar romant a zo gouestlet d’e varnedigezh, heñvel ouzh ur jestre’hoari. Kondaonet e vo Meursault d’ar marv.

Ur bed “nannster” a zo livet gant an aozer, m’en em gav ar benndudenn en e-unan en ur gevredigezh ha ne fell ket dezhañ heuliañ he reolennoù. Doare en deus Meursault da vezañ kollet er bed-mañ. Un estren eo evit e genseurtez, hag evitañ e-unan kenkoulz all. Sellout a ra ouzh ar bed diouzh an diavaez, e-giz ma ne gemerje ket perzh e birvilh ar vuhez, hag e-giz ma ne vije ster ebet gant heuliad an darvoudoù. Gant frazennoù berr ha difrom e ra Camus evit lakaat muioc’h a hed etre ar gevredigezh hag e benndudenn. Yen a-walc’h eo ar stil, petra bennak m’eo mestroniet kaer. Doare un teorem zo gant ar romant e meur a geñver. Er memes bloavezh e vo moullet *Gwengel Sizyphe*. Nac’hañ a ra Meursault c’hoari ur roll. Nac’hañ a ra livañ gevier. Ne vo treuzvarc’had ebet eus e berzh.

Hag er c'heñver-se, daoust pegen dister e hañval bezañ e vuhez, e tiskouez Meursault un seurt harozegezh dibar. Lavarout a ra ar wirionez evel m'emañ evitañ, daoust ma n'hell ket ar gevredigezh degemer anezhi evel m'emañ, just a-walc'h. Ha kenderc'hel a raio da lavarout ar wirionez betek penn, kentoc'h eget sachañ e groc'hen gantañ.

Pa zeu ur beleg d'e wela-denniñ en toull-bac'h, ez a e

breskenn. N'en deus kelenn da gaout digant den. Ha den ne c'hell displegañ dezhañ pehini eo ster e vuhez. Dezhañ eo da zibab. Aze e santer luskad ar vezoudelouriezh oc'h en em ledañ. Sed a embanne Camus a-zivout an nannster : « Diouzh an nannster e tezustuman tri heuliad hag a zo va ravolt, va frankiz ha va fasion »...

*MBdB*

**Histoire de l'Ukraine, le  
point de vue ukrainien,**  
gant Luc Pauwels ha Tina  
Pauwels-Van der Heyden,  
Yoran embanner,  
488 pajenn, 12€



Ur wech ouzhpenn e kinnig deomp Yoran ur sell war istor ur vro ha n'anavazer ket kalz daoust ma klever komz diwar he fenn. Luziet spontus eo istor ar broioù a gaver etre ar Mor Baltek ha ar Mor Du. Kriz-kenañ eo bet an darvoudoù alies. Broioù a weler evel bet gwasket (Polonia da skouer) a zo bet gwaskerien da vareoù zo. Kalz levezonoù a zo bet war an darn

ledan-se eus ar c'hevandir : hini ar Slaved evel-just, hini ar pobloù bet aze en o-raok, (Skited, Saoromated...), hini ar Vikinged, hini ar Vongoled, hini an Impalaeriezh Bizantion hag an Durked goude, hini Impalaeriezh Aostria, hini an ilizoù ortodoks hag a-wechoù ar Pab... Deskiñ a reer ur bern traoù. E-touez an traoù am eus kavet dedennus pe kentelius ez eus :

istor Rous Kiev (etre 860 ha 1240 pe war-dro) renet gant priñsed a orin viking a voe, en ur stumm mammenn voutin Ukraina, Rusia ha Belarus ; ar pezh a gaver a-zivout Krimea ; ar Gosaked hag o flas en istor ar vro ; ar stourmerien sevenadurel ha politikel ukrainat ; ar prantad goude brezel pevarzek gant degouezh spontus an *Holodomor* (etre 7 ha 10 milion a dud lazhet !), un naonegezh aozet a-ratozh gant renad Stalin e 1932-33 ; ar prantad abaoe dizalc'hidigezh Ukraina gant

prederiadennoù dedennus a-zivout broadelezh / keodedou-riezh / yezh. Sikour a ra al levr da gompren traoù zo ha da verzout pegen luziet eo ar saviadoù. N'eo ket manikean daoust d'e savboent ukrainat. Gellout a reer bezañ un tamm kollet da vareoù zo met sikouret e vezer gant kartennoù, taolennoù ha skeudennoù. Ma fell da Yann lenner mont pelloc'h ez eus ul levr lennadur fonnus e dibenn an oberenn.

HL

**Ar skrilh a lavaras Sut !,**  
gant Yann Varc'h Thorel,  
mellivadennoù gant  
Maël Vérot,  
Aber,  
88 pajenn, 12€



« Aet oa Arzhel ar bleiz-bouzel / Oc'h abona war brad Mona / Arsa 'ta ! Che ! Oc'hala !... » Savet eo bet *Ar skrilh a lavare Sut !* diwar genganou, trouzadelloù, c'hoarioù sonioù ha c'hoarioù gerioù. Barzhonegoù ha danevelloù fentus, skañv ha kizidik, evit ar


vugale. N'omp ket pell diouzh spered ar rismodelloù. Ne zispiljo ket al levr-se d'an dud deuet evelkent, gant ma talc'hont soñj eus bed hud o bugaleaj hag eus furnez voemus kontadennoù Sina. Darn eus an testennoù a zo bet ijinet ha savet e brezhoneg gant Yann Varc'h Thorel e-unan,

lod all a zo bet troet gantañ  
diwar ar sinaeg pe diwar Tristan  
Corbière, Tagore, Apollinaire,  
Garcia Lorca, Bonnefoy, Kei-

neg... Ur veskailhez vourrus  
daoust dezhi bezañ gwall  
luziet...

MBdB

**Divskouarn an diaoul,**  
gant Eric Savoisin  
skeudennaouet gant  
Nicolas Hubesh,  
brezhoneg gant  
Benead Vernon,  
Sav-Heol,  
40 pajenn, 5,50€



Emichañs e raio berzh al  
levrig-se, e-touez ar vugale  
adalek 8-9 bloaz. Plijadur am  
eus bet-me ouzh e lenn, evel  
holl levrioù dastumad *Kañfardig*  
ha dastumad *Bidoc'hig* emban-  
net gant *Sav-Heol*. Gant  
*Divskouarn an diaoul* ez eus  
anv eus ur paotrig hag a zo bras-  
sovaj e zivskouarn, ken e ra  
goap ar skolidi outañ war porzh  
ar skol. An “arallvedad” a vez

graet anezhañ ganto. Ur gwir  
binijenn bemdeziek... Gant  
skoazell un iskis a vorganezig e  
teuio a-benn d'en em zizo-  
ber eus e zivskouarn olifant... Met  
gwall ger e vo ar priz da baeañ.  
Ha furoc'h deomp marteze,  
deskiñ degemer hor c'horf evel  
m'emañ... Biskoazh gwell !

MBdB

**Histoire de Bretagne, Le  
point de vue breton,**  
gant Jean-Pierre Le Mat,  
Yoran embanner,  
416 pajenn, 12€




Anavezet eo levr Jean-Pierre Le Mat peogwir eo an embannadur-mañ an trede hini. Pa geñverier gant embannadur 2010, e kaver muioc'h a skeudennoù, un nebeud daveoù ouzhpenn, ha kemmoù en daou chabistr diwezhañ evel-just. Er stagadennoù e kaver ur pennad ouzhpenn (29 fajenn) a-zivout ar brezhoneg

gant Evi Bargain. War-lerc'h goudeskrid Jean-Pierre Le Mat (*Les nations insuffisantes*) ez eus ur skrid gant Yoran, un doare taol-imor anvet *Apparté de l'éditeur*. Domaj eo ne vefe netra e liv el levr ; plijusoc'h 'vefe skeudennoù zo hag aesoc'h lenn ar c'hartennoù.

HL

**E donder va huñvre,  
Au cœur de mon rêve,**  
gant Naig Rozmor,  
Divyezhek,  
Galleg gant Maguy Kérisit,  
Emgleo Breiz,  
354 fajenn, 22,90€



Unan eus levrioù diwezhañ bet embannet gant *Emgleo Breiz*, ma n'eo ket an hini diwezhañ, eo an dastumad-se.

Ur levr kinniget brav eo *E donder va huñvre*, kement ha dougen enor da Naig Rozmor, hag a oa aet d'an Anaon e miz



Meurzh 2015. Strollet ez eus bet ennañ barzhonegoù *Karantez ha karantez* (1977), *Evel eun tantad* (1995) ha barzhonegoù all strewet amañ-hag-ahont. N'eo ket bet degemeret he barzhonegoù troet, niverus anezho, diwar Tagore, Senghor, Grall, Le Gouic... Re dev e vije bet al levrenn. Mignoned Naig Rozmor o deus kemeret perzh er c'henavo diwezhañ : Myriam Coadou gant he livadurioù flamm, Bob Simon en e bennad digeriñ, Gérard Le Gouic er pennad klozañ. Maguy Kerisit eo he deus graet war-dro an droidigezh c'hallek. Un droidigezh dieub a-walc'h, pa lavarín gwir. Moarvat e oa bet roet hec'h asant gant Naig hec'h-unan war an doare treiñ, rak n'eus ket diaesoc'h eget treiñ barzhoniezh. Diaes eo chom feal d'al lusk, d'ar c'hlotennoù, d'ar skeudennoù, da c'henganoù, d'an aergelc'h, d'an troiennoù... annez adkrouiñ ar varzhoneg mod pe vod. Neoazh em eus kavet ez ae re bell ganti alies. Pajenn 200-201 da skouer, he deus tuet Maguy Kerisit gant ar c'hlotennoù kentoc'h eget gant ar gerioù : « N'em-boa ket bet amzer da gutuill/ Bleuniou orañjez va

eured/ M'edon distro eus ar vered/ Em dilhad kañv, em daelou puill » a zo deuet da vezañ « *Moi qui voulais aller cueillir/ Mes blanches fleurs de jeune mariée/ C'est la tombe que je vois ouvrir/ Je suis en deuil, tête baissée* ».

Teir rann a ya d'ober an teskad, titlet : *Selaou !, Lida, Sevel...* Barzhonegoù *Karantez ha karantez* o doa desachet brud war ar varzhez. Ne vezed ket kustum d'an erozegezh e bedigbed al lizhiri brezhonek... Feuket e oa bet Klerg, ha barnet taer ar varzhez gantañ. Respont Naig Rozmor a gaver en embannadur-mañ. Bremañ e c'heller prizañ barzhonegoù Naig Rozmor gant muioc'h a sederoni. E-touez ar re bersonelañ hag ar re vravañ e lakaan ar re ma vez komzet diardoù eus c'hoantoù ar c'hig just-a-walc'h, e-giz *Hosanna, Kregin, Dishual, Eur mister joaiuz...* Enno ez eus anv eus lidañ ar vuhez, korf hag ene. Ul liderezh pagan ha sakr war ar memes tro. Ar barzhonegoù kañv a zo e-touez ar re vravañ ivez : *Daouarn va zad, Tremenvan, Evit gouel va mamm, Keuz...* Barzhonegoù stourm a gaver kenkoulz-all, *Breur du, Meulgan* en o zouez,


hag a zegas soñj eus he fezh-  
c'hoari *Ar Mestr*, ma tiskuilhe  
ar skarzadennoù he doa bevet  
pa oa-hi bugel war ar maez.  
Stourmet he deus Naig Rozmor  
evit frankiz ar maouezed, peo-  
tramant evit difenn he yezh  
vamm, ar brezhoneg. Evit an  
nemorant, n'eo ket kenkoulz.

**Parkadoù sivi da viken,**  
kanaouennoù brezhonek  
troet diwar yezhoù all,  
gant Mark Kerrain,  
Sav-Heol,  
52 bajenn, 4€

E *Parkadoù sivi da viken* ez  
eus bet dastumet gant Mark  
Kerrain un dornad kanaouennoù  
troet diwar ar saozneg, an  
italianeg, an alamaneg, hag unan  
bennak diwar ar galleg hag ar  
portugaleg. Kanaouennoù holl-  
vrudet gant John Lennon, Bob  
Dylan, Osvaldo Farrés, Bar-  
bara... a c'hello bezañ implijet  
hiviziken e-pad ar c'hentelioù  
brezhoneg, pe gant mignoned e  
korn an oaled. En o zouez e  
kavor seizh kanaouenn evit  
bugale, aes ober ganto er skolioù.  
Ar c'hanaouennoù orin a c'hel-

Lod eus ar barzhonegoù a zo  
kalz gwanoc'h. Bezet pe vezet e  
chomo Naig Rozmor unan eus  
hor barzhezved fromusañ, hag en  
amen d'an holl, pezh n'eo ket  
dister dra.


*MBdB*



ler adapout war ar rouedad  
peurvuiañ evit kaout soñj eus an  
ton hag eus al lusk. Daveoù a  
vez kinniget e fin ar c'hana-  
ouennoù.

*MBdB*

**Ils ont fait la France,  
De Clovis à Charles  
De Gaulle – Contre-  
enquête,**  
gant Jean-Pierre le Mat,  
Yoran embanner  
294 pajenn, 16€



Dedennus hag hegazus eo al levr-mañ. N'eo ket ur studiadenñ hepken, tennañ a ra alies d'ar flemmskrid. Prizius eo kaout arroudennoù a ro ur sell all war tud zo, hag ul labour talvoudus eo bezañ strollet anezho. N'eo ket ken eeun an traoù pa ro an aozer e soñj. Diaezet on bet da skouer gant ar pezh a lenner a-zivout Kumun Pariz : « *La Commune de Paris est un soulèvement jacobin. C'est aussi un événement culte. Du fond de la défaite de 1870, l'allégorie de la liberté a surgi dans la ville lumière. Ou, si l'on en croit les artistes et les drapeaux, n'était-ce pas plutôt celle du nationalisme français* ». Mont a ra an aozer pell ganti o veskañ Kumun Pariz (an darvoud) hag ar pezh a zeuas da vezañ un toullad eus ar berzhidi (tud gant o dibaboù). An dave d'an arzourien a zo iskis pa soñjer er pezh en doa

bet Gustave Courbet da c'houzañv abalamour da ziskar *La Colonne Vendôme* hag e niver an arzourien vrudet a voe enep-krenn Kumun Pariz. An dave d'ar bannieloù a zo ken souezhus all pa ouzer e oa ruz hini ar gumun hag e oa an triliv hini tud Versailhez... Dreist eo kaout dielloù met ret eo bezañ un tamm aketus gant an evezhia-dennoù eta.

HL

# KELAOUENNOÙ



**Jerom OLIVRY &  
Tudual HUON**

pa oa bet roet bod da Euskariz e Breizh, gant an heuliadoù a ouiomp. Ar brezhoneg war bep tachenn : sed aze, evit ar vrezhonegerien an doare da stourm. Dek vloaz zo, neuze, e reseve pep den koumanantet da *Vremañ* ur CD-Rom gant e niverenn.

Keleier a bep seurt stourm a vez kavet el lodenn *Bremañ er bed* : an tamazight bet lakaet da yezh ofisiel en Aljeria ha ne laka ket an holl da sevel a-du ; ur paz istorel graet gant henvroidi Kanada evit o gwirioù ; bilhidi-bank Bro-Gembre ; stourm henvroidi Gwiana gant ur sinadeg pouezus ; skipailhoù merc'hed degemeret en trede Europeada (tournamant mell-droad evit broadoù ha pobloù

## > **Bremañ (407)**

Gant un taol-lagad war amzer dremenet ar gelaouenn ha Breizh e krog pep niverenn **Bremañ**. Ar wech-mañ e lenner e oa puilh c'hoazh raktresoù ar vrezhonegerien tregont vloaz zo, pa ne veze ket ankouet ar re vouzar war hent adsav hor yezh. Ugent vloaz zo e tiskoueze ar Vretoned ne oa ket dazont o yezh o fal nemetañ, an holl yezhoù minorelaet ne lâran ket,

hep Stad) ; trizek yezh ouzhpennet er meziant *Google Translate* (ha tamm brezhoneg ebet evit c'hoazh !).

Ur pennad dedennus-kenañ a lenner el lodenn *Anavezout ar bed* diwar-benn ar Vodou. Eus pelec'h e teu ? Petra eo ent-resis ar Vodou-se ? Ur relijion ? Ur preder, pe c'hoazh strobinnellezh ? An titouroù a gaver amañ a sikouro c'hoazh da gompren gwelloc'h al levr *Vodou zo amañ*, meneget e fin ar pennad.

Alies e klever arc'hadurioù er vro a-zivout ur c'hleweled e brezhoneg penn-da-benn. Hag alies gwech ec'h a ar Vretoned da welet petra a vez graet er broioù all. *BBC Alba* a zo ur chadenn e gouezeleg penn-da-benn... met rebechoù a gaver bepred kar an aodimat eo ar pezh a laka pep chadenn da vevañ ha da badout !

Stourm ar Vretoned, ar wech-mañ, el lodenn *Bremañ e Breizh*, pa vez kaoz eus Lorentxa Guimon, an Euskaradez a oa bet bac'het e 2003. Ouzhpenn 500 den a oa bet o vanisfestiñ e miz C'hwevrer tremenet ha setu hi, hiziv an deiz, dieub da vat, goude ur stourm war meur a vloavezh. Kaoz zo ivez eus ar referendom diwar-benn aerborzh

Kernitron-al-Lann, pe c'hoazh eus ur servij postelerezh nevez e .bzh ! Ur pennad all a c'heller lenn diwar-benn levr Goulc'han Kervella a oa bet nac'het gant an Deskadurezh Stad abalamour ma oa meneget anv Roparz Hemon ennañ. Peadra d'en em soñjal... ha direbechoc'h e tlefe bezañ ar Vretoned eget o amezeien c'hall ? Embannet e vo e levr *Mari-vorgan ar glandour*, memes tra, gant *Al Liamm* dizale.

Un nebeud mizioù zo e oa bet skoet an darn brasañ eus an dud gant feulster manifestadegoù al labourerien-douar. El lodenn *Bevañ e Breizh* e lenner ur pennad hag a zispleg mat diaesterioù ar beizanted.

N'eo ket ar wech kentañ ez eus kaoz eus ar brezhoneg en Azia. Ar wech-mañ hag evit an eil gwech (s.o. *Bremañ* niv. 406) ez eo e Bro-Sina e vez komzet brezhoneg, a-drugarez d'un askor bet ijinet gant an ao. Jakez, Breizhad o chom e Sina.

Teuliad an niverenn a zo gouestlet d'ar Redadeg 2016, a vo roet lañs dezhi adalek savadur nevez *Yezhoù ha Sevenadur*, e Sant-Ervlan, hag a stroll meur a gevredigezh a ra war-dro ar brezhoneg (*Diwan*, *Kentelioù*

an Noz, KDSK...). *Youn ha Solena* a zo unan eus ar re-se ivez, ha lakaet e vezont war-wel en teuliad-mañ dre ma vo digoret a-benn miz Genver 2017 ar mikromagouri-se. Dizoloet e vez en teuliad un nebeud raktresoù a oa bet skoazellet gant *Ar Redadeg*, kement hag un nebeud a vo skoazellet er bloaz-mañ ivez. Lenn a reer ur pennad e fin an teuliad diwar-

benn bagad Lokoal-Mendon, eno ec'h erruo *Ar Redadeg* d'ar 7 a viz Mae.

Puilheo al lodennoù gouestlet d'an arzoù a bep seurt : levrioù evit ar re vras kement hag ar re vihan, David Bowie (aet da Anaon e miz Genver tremenet), sonerezh a-vremañ, kanaouennoù a-wechall... Sed aze peadra da voueta spered pep hini !

JO



## > Al Lanv (136)

Liesseurt ha puilh ar penna-  
doù a c'heller lenn er gelaouenn  
trimiziek-mañ. Keleier etrevroa-  
del : dilennadegoù e Korsika,  
bloavezhioù brezel e Siria, ar  
skolioù euskareg Seaska.  
Pennadoù hiroc'h diwar-benn ar

Vuzulmiz er Frañs gant Ernest  
Olory, kenstrivadegoù kentañ a  
Vuzik hengounel e Breizh gant  
Joseph Martin.

Gwendal Denez en deus  
diskoachet en dielloù lizheroù  
*Kuzul ar Brezhoneg* (bloavezh  
1969) hag a ziskouez splann ez  
eus bet klasket meur a wech  
gant *KaB* kemer perzh da vat e  
*GALV* ha kement-se a oa bet  
nac'het gant Fañch Broudic.  
Hemañ avat a lavar ar c'hontrol  
er gelaouenn *Le Tregor*. Al  
lizheroù embannet gant *Al lanv*  
a ziskouez splann ivez penaos e  
c'heller hiziv an deiz distresañ  
ar wirionez ha kontañ gevier  
a-benn ar fin.

Daou skrid a denn d'ar  
rentaoù-kont beaj : *Kalifornia*,  
*bro an diskemmoù* gant Marivon  
Gwilhouz, *Breizh-Amerika latin*,




ar memes *Religion* ? Miwoked kreiz *Kalifornia* gant Gireg Konan.

Ar vMiwoked a oa bet laeret o douaroù diganto ha drouklazhet ar pep brasañ anezho gant ar soudarded amerikan da vare ar *Gold Rush*.

El lodenn gouestlet d'al lennegezh e c'heller lenn pen-nad Alan Botrel diwar-benn levr Primo Levi : *Hag un den ez eus anezhañ*, embannet gant *Mouladurioù Hor Yezh*. Un testeni poanuis ha mantrus eus buhez ar brizonidi yuzev er c'hampoù

bac'h alaman. Un danevell hir gant Loeiz Guillou : *Arc'hlasker aour* a ginniger d'al lenner ivez. Teir barzhoneg gant Kervalan a zo ivez : *Tantadoù ar gounnar*; *Bac'had al loar* ha *Little boy ha fat man*. Daniel an Doujet en e gronikenn *E korn ur stalenn* a ginnig deomp daou bennad tennet eus ul levr skrivet gant Yann-Vari Heneu : *Gweladenn Tondal* (1932). An digoradur, a c'heller lenn ivez, a oa bet skrivet gant Iwan an Diberder.

TH



## > Musique bretonne (246)

Emañ poltred Albert Poulain, aet da Anaon nevez zo, war golo

ar gelaouenn hag ul lodenn vat anezhi a zo gouestlet d'ar marvailher, kaner ha daspugner a oa anezhañ.

Anv zo ivez eus un triad nevez *Trio Ketiketañ* : Brigitte ha Katell Kloareg ha Kristina Kuusisto eus Bro-Finland. Labouret o deus asambles war ar *Barzaz Breiz* (T.H. De la Villemarqué) hag ar *C'halevala* (Elias Lönnrot). Ur bladenn arc'hant a zo bet enrollet ganto.

E lodenn an dielloù ez eus kaoz eus an enrolladennoù bet graet gant Ferdinand Brunot e 1912. Kelenner war ar yezhoniezh e oa er Sorbonne ha krouet en doa *Les archives de la parole*.



166 enrolladenn a oa bet graet gantañ. En Ardennes e oa bet hag eno en doa enrollet François Le Duff e brezhoneg. Kontañ a ra e-touez traoù all e chomadenn e Madagaskar pa oa Bro-Frañs o stourm ouzh an emsaverien eno. An div enrolladenn all e brezhoneg a oa bet graet er Sorbonne. Daou soudard a oa bet aterset : Alain Ligeour eus Bannaleg ha

Jean Limbour eus Pont-Aven.  
Treuzskrivadur ha troidigezh an  
div enrolladenn-se a c'heller  
kaout war [www.dastum.bzh-  
Archives du patrimoine oral](http://www.dastum.bzh-Archives du patrimoine oral).

Emañ Ruzerion Traouré o  
paouez lakaat embann ur bla-  
denn sonennoù eus korn-bro  
Ligidig gant *Dastum Bro-  
Ereg*.

 $TH$ 

bet pennad Olavo de Carvalho :  
*Ar c'hoariva meur*. Ur skrid  
 diwar-benn al levr *Ar vuhez er*  
*Bed Soviedel* gant Aleksander  
 Zinoviev. *An den bet ganet dall*  
 a zo bet skrivet gant Youenn  
 Troal. *Notennoù diwar an*  
*darvoudoù* a zo bet savet gant  
 Yann Maneguen

 $TH$ [illegible]

### > Imbouc'h (94)

Donwal Gwenvenez en deus skrivet ur pennad hir diwarbenn implij an anv-gwan yuzev-kristen. « Muioc’h a liammoù a zo etre Muzulmiz ha Yuzevion e par ar relijion eget ne ’z eus etre Kristenion ha Yuzevion, » emezañ. Gant Ewan Delanoy eo



## > Breizh da zont (522)

Er c'hannadig-mañ ez eus anv eus enkadenn al labourdouar e Breizh. « C'hwezh ar marv » zo e Breizh eme Herve Le Quéré, ezel ar *Parti Breton*. Ma fell d'ar Vretoned dont er-maez eus an enkadenn-se e rankint bezañ mestr war ar pezh a vez produet ganto ha difenn ouzh an amezeg da laerezh o madoù. War-zu an emrenerezh e ranker mont kousto pe gousto. Gant Thierry Jigourel ez eus kaoz eus ar raktres lezenn nevez lakaet war-wel gant ar gouarnamant gall : dilemel digant an dud tamallet outo bezañ sponterien o broadelezh gall. Un afer gwall arvarus pa vo aes tamall

forzh piv hag o lakaat da dud divro.


Daou bennad berr e brezhoneg a zo gant Al Legestr Kreizig. Adkavet en deus Arnaldo Ortegi e frankiz goude 7 vloaz toullbac'h e Bro-Spagn. Tamallet e oa bet outañ bout prezidant *Batasuna*, ar strollad a oa bet disklêriet gant gouarnamant Bro-Spagn evel ur strollad sponterien. *Batasuna* a oa deuet da vezañ *Sortu* hag en dilennadegoù diwezhañ en Euskadi o doa tapet 15% eus ar mouezhioù. War ar renk e vo Ortegi evit an dilennadegoù da zont en diskaramzer 2016. An eil pennad a zo diwar-benn Iwerzhon. Aet eo skuizh an Iwerzhoniz gant ar gwask a zo bet lakaet warno, gant o goprou izel hag ar c'hinnigoù labour dister. Piv 'vo lakaet da gentañ ministr ? Peseurt emglevioù a vo ret kaout etre ar strolladoù politikel ?

Thierry Jigourel en deus bet tro da lenn daou levr nevez embannet : *Breizh Atao ! Mordrel, Delaporte, Lainé, Fouéré : une mystique nationale (1901-1948)* gant Sébastien Carney (*PUR*) ha *Viens rejoindre notre armée ! 1944, une Résistance bretonne à contretemps* gant Yves Mervin

(YM éditions). N'eus sell istorel ebet war istor ar vro, an idelo-giezh breizhat hag european eme T. Jigourel e levr S. Carney. Bet eo o furchal en dielloù, eno

en deus kavet ur bern istorioù, darvoudoù ha tra ken. Gant levr Yves Mervin ez eus ur sell ledanoc'h ha poellekoc'h.

TH




## > Hor yezh (285)

Gouestlet eo an niverenn en he fezh d'ur studiadenenn bet graet gant Pierre-Yves Kersulec : *Un evezhiadenn bennak diwar-benn ar stumm-lec'hiañ ha stummoù all ar verb Bezañ e brezhoneg An Enez-Sun*. Kaoz a zo er pennad eus stummoù ar verb bezañ : *zo, eus, eo, edi, vez* evit an amzer-vremañ hag en amzer-dremenet : *yade, vez*. « Stummoù ar verb bezañ a ya d'ober derc'h-derv ar brezhoneg, evel ma ouzer. Dont a-benn da gompren

pevare e vez implijet unan pe egile eus anezho, hag evit peseurt abegoù, a c'hell bezañ ur wall luziadenn a-wezhioù, » eme P. Y. Kersulec. E rannyezh an Enez-Sun e c'hell bezañ luzietoc'h an traoù eget er brezhonegoù all, en amzer dremenet pa 'z eus tri stumm disheñvel : *oa, yade* ha *veze* implijet o-zri a-raok pe war-lerc'h ur rener.

TH



### > Le Peuple Breton (627)

Jean-Michel Sanner, unan eus krouerien *Ar Redadeg*, en deus skrivet ar pennad kentañ e-barzh **Le Peuple breton** ha da heul ez eus ur pennad hir gant Gael Briand diwar-benn *Ar Redadeg*. Ar pempvet gwech eo ar bloaz-mañ ha 1700 km a vo da redek. Dougen bri a ra G. Briand d'ar re a vez bep bloaz o reiñ un tamm skoazell, goude un dervezhiad labour start, tud a youl vat na glaskont ket tapout an disterañ brud.

Ar pennad kentañ a c'heller lenn el lodenn vrezhonek a zo bet skrivet gant Talwyn Baudu diwar-benn ur gevredigezh nevez savet : *Brezhoneg e Brest*.

Pal ar gevredigezh a zo kas da benn obererezhioù disheñvel evit ar re o deus c'hoant da dremen un abardaevezh pe un nozvezh e brezhoneg. En *Tir na nog*, un davarn e traoñ straed Siam, e vez aozet un abadennkan ha tud 'vez ingal. Aozet e oa bet un abadenn tañva wiski ivez gant Gwenole Olivier. Pourmenadennoù ha c'hoarioù a vez kinniget ivez. Dre ar genrouedad, a-drugarez d'ar mediaoù sokial e vez kelaouet an dud ha berzh a ra rak un hanter-kant a dud a vez bep tro.

Plijet-kaer eo bet Mael Vérot gant ar film *Demain* (warc'hoazh) ha savet gantañ ur pennad evit broudañ an dud da vont da welout ar film-se. Savet eo bet ar film gant Cyril Dion ha Mélanie Laurent. Dek bro disheñvel a zo bet gweladennet ganto hag e kement bro o deus kavet tud a oa o klask bezañ emren, o klask ijinañ un doare nevez da labourat an douar hag a vije doujus ouzh an natur, o klask kas obererezhioù a bep seurt da bennvad evit ma vije an dud eürus asambles kuit da foeltrañ ar blanedenn a-bezh.


Dastum kailh ar c'hondon a c'hell bezañ gwall arvarus ha

drastus evit an endro eme Paol ar Meur en e bennad.

C’hwec’h levr a zo bet lennet ha barnet gant Herve Lannuzel en e bennad *Du ha gwenn ha plas da lenn...* : *Persepolis*, lakaet e brezhoneg gant Tual Kerrain ; *N’eus ket a garantez eürus* gant Goulc’han Kervella ;

*En ur lenn Tangi Malmanche* gant Morgan ar Menn ; *Ar morgazh* gant Jakez-Erwan Mouton ; *Divemor* gant Pierre-Emmanuel Marais ha *Goulennoù Célestine* gant Gabrielle Vincent, lakaet e brezhoneg gant Goulc’han Kervella.

TH



## > Bro Nevez (137)

E-barzh niv. 137 **Bro Nevez** (kannadig an *ICDLB*, e saozneg penn-da-benn) hon eus bet tro da lenn ur studiadenenn hir ha kentelius gant Diarmuid O'Neill, bet embannet gantañ ul levr e 2005 – ti- embann *Y Lolfa* : *Rebuilding the Celtic Languages – Reversing language shift in the Celtic Countries*. Emañ ar brezhoneg en arvar bras diouzh

kemennoù an *UNESCO*, eus ur milion a vrezhonegerien e 1950 ez eo diskennet an niver da 200 000 well-wazh. Kreskiñ a ra niver ar vugale o teskiñ brezhoneg er skolioù avat, 4,5% war-dro bep bloaz, memes dregantad hag e Bro-Iwerzhon.

An dregantad a familhoù a implij ar brezhoneg er gêr a zo etre 3 ha 4 %. E Kembre ez eus war-dro 8% eus ar familhoù oc’h ober gant ar c’hembraeg. Eno emañ an dalc’h eme D. O'Neill hag ivez Joshua Fishman. Kelenn brezhoneg er skolioù n’eo ket a-walc’h pell ac’hann evit saveteiñ ar yezh. E Kembre ez eus bet merzet ivez e oa digresket niver ar gembraegerien eus 20 000 den. Kresk an niver a studieren war ar yezh n’eo ket evit talañ ouzh digresk an niver a diegezhioù oc’h ober gant ar c’hembraeg er gêr.

E Breizh eo kresket an niver a familhoù oc'h ober gant ar brezhoneg : pa oa dindan 2% tro ar bloavezhioù 1990 ez eus bremañ war-dro 4%. 30% d'an nebeutañ (50% a vije gwelloc'h) a vije ret evit dont a-benn da saveteiñ ar yezh.

Evit gwellaat stad an traoù eo ret degas ar brezhoneg er vuhez foran evel-just (efedus eo bet ar c'houlzad *Ya d'ar brezhoneg* sur a-walc'h) met an holl nerzhioù a rank bout duraet war-

du ar familhoù hag ar vuhez kevredigezhel. Memes kudenn a gaver e Katalunia hag Euskadi.

War a hañval, eme D. O'Neill, emañ an holl vroioù-se oc'h ober memes fazi hag an Iwerzhoniz da lavaret eo postañ ar muiañ posubl a arc'hant e kelennadurezh ar yezh ha lakaat re nebeud a energiezh evit diorren ar vuhez familh ha kevredigezel.

TH



**Annaig KERVELLA,**  
**Tudual HUON &**  
**HERVE LATIMIER**

**Annaig KERVELLA,**  
**Tudual HUON &**  
**HERVE LATIMIER**

**HOR MIGNONED** \_\_\_\_\_

**Kaňv :**

Mantret bras omp bet p'hor boa klevet e oa aet Nolwenn Louarn d'an Anaon d'ar Merc'her 23 a viz Meurzh e Roazhon.



Ganet e oa bet d'an 28 a viz Eost 1951. Pevare bugel an tiegezh  
Louarn e oa.

Mouse'hoarzh, c'hoarzh ha mouezh Nolwenn a chomo bev en hor c'halonoù. Ur plac'h seder ha yaüs e oa. Bepred prest da sikour, da vont war-raok. Ur stourmerez youlek ha laouen bepred. Eeun ha didro. Ha n'he doa ket diegi da lâret he soñj. Ur perzh heverk he doa kemeret er film *Ar gwim* bet sevenet gant Soazig Daniellou e

2015. Un diell brizius evit adkavout ar vaouez kalonek, aet re vuan, da Dír na nÓg, daou viz goude he mamm, Noela Olier.

Klañvdiourez e oa bet a-raok mont da labourat gant skipailh an Ofis e Roazhon.

Lidet eo bet hec'h obidoù e iliz Sant Stefan Roazhon d'ar Sadorn 26 a viz Meurzh. Douaret eo bet e bered Kermabon e Gwaien bro he zud, e-kerzh ul lid eus ar fromusañ.

D'he fried Rens Gastinger, d'he mibien Kilian ha Steven, d'he merc'h-vihan Aouregan ha d'he familh a-bezh e kasomp hon gourc'hemennoù start a gengañv.

Ra vo skañv dezhi douar Breizh, ar vro a venne mont betek an trec'h eviti.

## PROFOÙ

---

Miz C'hwevrer : Bernard AUDIC ; Paul CAULET ; Jan-Maï ha Maï-Gristin GWERNHALEG ; Jean-Pierre CLOAREC ; Anton AR BARZH ; Jean-Paul LEBLAY ; Padrig AN HABASK ; Roger BIZIEN ; Yvon ABIVEN ; Manuel BIANNIC ; Tangi LOUARN ; Pierre QUENTEL

— War un dro : 230€

Miz Meurzh : André LE DEROFF ; Me Allain MERDRIGNAC ; Pol Yvon VIROT ; Francis GOHIN ; Dr Yves GOURVES ; Germain FEREC ; Alain PEIGNE ; Jean-Louis BUSSON ; Philippe CERCEAU ; Yves GUILLOU ; Michel MANAC'H ; Erwan-Weltaz VALLERIE ; Bernard LE RALLIC ; Georges GUEVEL

— War un dro : 325€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn  
d'hor skoazellerien.*

Emañ Xunta Galicia o paouez lakaat enlinenn ur geriadur galizeg digoust : *Digalego*. 20 vloaz zo bet ranket kaout evit peurechuiñ al labour-se. 65 000 termen a gaver ennañ troet e meur a yezh (galleg en o zouez). Sed amañ al liamm rekis :

<http://digalego.xunta.gal> hag ivez [www.lingua.gal](http://www.lingua.gal)

Ur porched nevez a zo bet lakaet enlinenn ivez hag a zo ul lec'h emgav evit al lennegezh e galizeg. Ennañ e vo kavet pennadoù-kaoz, kelaouadennoù ha roll an darvoudoù lennegel :

[www.lermos.gal](http://www.lermos.gal)

## BREZHWEB-SKRIVAGNERIEN

---

Nevez zo en deus skipailh *Brezhoweb* roet lañs d'ur rummad abadennoù nevez. Etre 6 ha 7 munut e pad an abadenn ha klevet e vez ur skrivagner o lenn unan eus e skridoù hag o tisplegañ petra eo e soñj war ar skrivañ.

Betek-henn ez eus bet klevet ha gwelet : David ar Gall, Aziliz Bourgès, Mich Beyer ha Bernez Tangi. Ur soñj vat eo sevel seurt abadennoù rak n'eo ket alies e vez roet ar gaoz d'ar skrivagnerien brezhoneg war-eeun, kuit a ardoù, dezho da lavaret penaos e labouront, e soñjont, e krouont o skridoù.

Setu penaos eo bet kinniget an abadenn gant *Brezhoweb* :

« Skrivagnerezed ha skrivagnerien int. Romantoù, danevelloù, barzhonegoù ha kanaouennoù a vez skrivet gante. Alies e vezont gwelet ha klevet er mediaoù da geñver embann ul levr, ur bladenn, met ne glever ket anezhe alies o lenn o oberennoù war-eeun, o lâret petra enne a zo a-bouez dezhe, doareoù ha temoù mesk-ha-mesk, o tisplegañ pezh a dalv skrivañ evite, na pezh a zegas dezhe.

C'hoant zo savet e skipailh *Brezhoweb* goût hiroc'h war o soñjoù dezhe, war ar pezh a reont, war an oberennoù a roont dimp ingal. Pevar warn-ugent anezhe o doa respontet d'hon fedadenn

hag asantet dont da rannañ o soñjoù ganimp, ha ganeoc’h, en ur mod simpl hag eeun.

Sed aze pezh ac’h a d’ober danvez ar rummad “Skrivagnerien” a ginnigomp rannañ ganeoc’h amañ, tamm-ha-tamm, gant kalz a blijadur. »

## UR PORCHED BREZHONEG E PENN-AR-BED \_\_\_\_\_

Keloù zo bet kaset deomp e oa ur raktres porched nevez o vezañ aozet e Penn-ar-Bed gant ar pal diskouez ar pezh a vez krouet e brezhoneg ha desachañ muioc’h a dud war-zu an abadennoù e brezhoneg hag an obererezhioù evit ar vrezhonegerien.

Ennañ e vo kavet ur renabl eus an obererezhioù padus (mediaouegoù, levraouegoù, embannerien, stalioù-levrioù, saloñsoù levrioù, strolladoù lenn a-stroll...). Aozet e vo deiziataer an abadennoù, an darvoudoù hag ar stajoù brezhonek da skouer. Kavet e vo roll an arזורien, ar c’hevredigezhioù gouest da ginnig video, kontadennoù, sonerezh, c’hoariva, sirk, sport, natur...

## STAG \_\_\_\_\_

Pellgargañ an arload *STAG* (<http://stag.bzh>) a c’hellit ober evit mont e darempred gant ar Vretoned en-dro deoc’h hag er bed a-bezh. Peadra zo da vout souezhet !

## WARANHENT : LEC’HIENN GENWETURIÑ AR VREZHONEGERIEN \_\_\_\_\_

Nevez zo ez eus bet savet ul lec’hienn nevez evit kenweturiñ. E brezhoneg penn-da-benn eo al lec’hienn-se. Un toullad lec’hiennoù a seurt-se a gaver c’hoazh war ar Rouedad, met ur c’hinnig

ouzhpenn a zo amañ : klakenniñ e brezhoneg en ur ziskenn priz ar veaj (blenier ha treizhidi) ha doujañ ouzh hon endro.

*Lec'hienn : waranhent.bzh*

## **MUIOC'H A VREZHONEG WAR AR SKRAMMOÙ ? \_\_\_\_\_**

E-kerzh emvod diwezhañ *Kuzul Sevenadurel Breizh* (12 a viz Meurzh 2015) ez eus bet kinniget nevezentioù a-bouez evit plas ar brezhoneg war ar skrammoù.

Goude daou vloavezh a eskemmoù (start a-wechoù war a seblant) ez eus bet sinet etre ar C'huzul Rannvro hag ar chadennoù skinwel lec'hel, *Brezhoweb* ha *France 3* ur Gevrat a balioù hag a beadra nevez (*Contrat d'objectifs et de moyens* e galleg). Anvet eo COM 2 gant an dud a vicher peogwir e oa ur c'hCom 1 a-raok. Adkemer a ra ar gevrat nevez ar pezh a oa en hini gozh e-keñver advouezhiañ, abadennoù c'hoari evel *Foeterien* hag all met mont a ra kalz en tu-hont.

Rannet eo bet tachennoù an emglev e ouzhpenn pemzek lodenn (filmoù berr, teulfimmoù, filmoù bevaat, kelaouadennoù, brezhoneg...) hag an holl berzhidi ne sinont ket pep tra. Meur a di a zo er c'hCOM eta.

Berr-ha-berr, hep emglev etre ar chadennoù lec'hel, *Brezhoweb* ha war dachennoù zo *France 3 Bretagne*, ne vefe ket aet an traoù war-raok.

An disoc'hoù : dek kelaouadenn e brezhoneg, peder abadenn sport, teir abadenn war-eeun, tri zeulfilm da nebeutañ, daou film berr... ouzhpenn ar pezh a oa dija.

Labour evit sevenerien, produerien, aktourien ha teknisianed e brezhoneg.

An hent raktreset a c'hellfe bezañ hemañ : kinniget e vez da *vBrezhoweb* a zo karget da briziañ ha da guzuliañ ; pa vez prest ar raktresoù e tibab en teir chadenn lec'hel ha *Brezhoweb* a-unvouezh pere a vo skignet ganto holl. Gellout a ra *France 3 Bretagne* mont er jeu ma fell dezhi...

Gant skoazell ar C’huzul Rannvro e c’hellfe ar chadennoù tizhout ar sammad arc’hant a ro tro dezho da vezañ arc’hantaouet gant ar *CNC* (an “efed loc’h” e yezh an deknokrated).

Sikouret e vez *Brezhoweb* evit e labour aliañ.

Ar c’hentañ kenlabour a-bouez etre ar chadennoù lec’hel ha *France 3 Bretagne* a vo un abadenn a-zivout *Ar Redadeg*.

Ur c’hammed yael eo evit ar brezhoneg war ar skrammoù hag evit ar c’hrouiñ er vro. Gant ma ouezo ar sellerien dont d’an emgav ha lavaret ar pezh a blij dezho hag ar pezh a fell dezho gwelet.

## **EMSAYADEG PASK 1916 E DULENN** \_\_\_\_\_

E meur a lec’h e Breizh eo bet lidet 100<sup>vet</sup> deiz-ha-bloaz Emsavadeg Lun Fask pa gredas un dornad Iwerzhoniz e Dulenn talañ ouzh ar Saozon ha dieubiñ o bro. Kaozeadennoù, abadennoù, filmoù, kentelioù iwerzhoneg, sonerezh a zo bet e Brest, Kemper, Sant-Nazer, Roazhon hag all... Ur c’homite a zo bet savet : *Eire-Breizh*, staliet en Oriant. Niverenn 417 *Al Liamm* a blede gant Iwerzhon.

## **WAR ROUDOÙ BRENDAN** \_\_\_\_\_

Eus miz Ebrel da viz Du 2016 ez eus un diskouezadeg a gont istor abati Landevenneg da vare ar Grenn-amzer. Diwar ar furchadegoù bet graet en abati e weler penaos e veve hag e labour e venec’h. Deskrivet e vez al labour a gase ar venec’h da benn evit kinklañ ha lizherenniñ levrioù. Brudet kenañ eo Landevenneg evit an enliverzh. Diwar film Tomm Moore *The secret of Kells* (e 2009) ha bet lakaet e brezhoneg, eo bet awenet an diskouezadeg. Mont a reer da heul Brendan, ur danvez manac’h yaouank o vezañ stummet, a-raok na vefe taget an abati gant ar Vikinged.

## TOLOSA HA BED KELTIA \_\_\_\_\_

Eus ar 15 d'an 19 a viz Mezheven e vo roet ton d'ar Bedoù keltiek e-kerzh ur festival bras anvet *Rio Loco*. Ur festival sevenadurel gouestlet d'ar sonerezh e kêr Tolosa eo. Menegomp e-touez ar Vretoned : Denez Prigent, Bagad Saozon, Patrick Molard, Erik Marchand, Erwan Kevarec, Miossec...



## PARK AR C'HOARIOÙ BREIZHEK \_\_\_\_\_

Nevez digoret eo bet *Le cârouj* (ar c'hroashent) e Mousterrfil. Gouestlet eo al lec'h dudi-mañ d'ar c'hoarioù breizhek. Dizoloet e vo o istor, o reolennoù ha dreist-holl e vo tu da c'hoari ha da embregiñ koulz en diavaez hag en diabarzh, hervez ar c'hoarioù hag an amzer.

*Evit gouzout hiroc'h : carouj.bzh*

## KEAV 2016 \_\_\_\_\_

Dalc'het e vo Skol-hañv *KEAV* e Kastellin e lise ar Stêr-Aon (lise labour-douar ha liorzhouriezh). Div sizhuniad studi ha dudi a vo kinniget :



Sizhunvezh kentañ : 10-16/07/2016

Eil sizhunvezh : 17-23/07/2016

E-pad an div sizhun-se e vo degemeret ar vugale 6-13 vloaz gant ur skipailh buhezourien en un *ALSH*.

E-pad ar sizhun gentañ e vo degemeret ar grennarded 14-16 vloaz.

270 € eo priz ur sizhuniad staj ha 230 € evit ar studierien amzer-leun hag an dud dilabour. Un niverenn stummadur dibaouez a zo gant *KEAV*.

Petra 'vo graet er c'hamp ? E-pad ar sizhun gentañ e vo lodennet ar stajidi diouzh o live etre pemp strollad. Pemp rummad kentelioù a vo aozet ivez evit an dud a oar kaozeal ha skrivañ mat a-walc'h brezhoneg kement a pleustriñ war un danvez a blij dezho. Pemp tem disheñvel a vo : an treiñ, an istor, distagadur ha pouez-mouezh, kazetenniñ gant *Radio Kerne* ha c'hoariva.

E-pad an eil sizhun e vo aozet pemp strollad ivez. Evit d'ar stajidi kaozeal ha studial brezhoneg e kentelioù un eur ha kart pe un eur gant daou gelenner d'an nebeutañ. Setu amañ temoù an eil sizhun a vo kinniget d'ar berzhidi : kembraeg live 1 ha 2, dañs ha kan, treiñ, distagadur ha pouez-mouezh.

*Ret eo paeañ an hanter eus priz ar staj en a-raok ha kas ar chekenn gant ar follenn enskrivañ da gKEAV :*

*22 hent Mouliouen*

*29000 Kemper*

*pgz : 02 98 95 59 31*

*postel : keav@wanadoo.fr*